

Ur spesad en arvar

Ur bern kaoz a lak ar poblañs Grilian war-ziskar :



Konifered planted.



Diskar strouezh lez ar c'hoadoù.



Garzaoueg distrujet.



Preizhet int gant ar c'hizhier (doñvet pe aet da ouez).



Cheñchamant hin (a ampech outañ da goañvaat).



Dispartiet e lec'h bevañ (hentoù...)

Penaos klask anezhañ ?

An aesañ d'ober zo klask restajoù kraoñ-kelvez pe kalonnennoù babu, rak un doare ispisial zo gantañ da debriñ. Posubl eo kavout un neiz ivez.



Kalonnennoù babu krignet gant ur Grilian (a gleiz) ha gant ur vorzigellenn pe ur vuenn (a zehoù).



A gleiz, kraoñ-kelvez krignet gant ur Grilian : lINTR-mat eo an toull, merk dent ebet en diabarzh). A zehoù, ur c'hraoñ-kelvez krignet gant ur vorzigellenn pe ur vuenn : merkoù dent zo a-skouer en diabarzh an toull.



Evit gouzout hiroc'h diwar e roudoù, al levrig «Le Muscardin» (24 p.) a c'hell bezañ karget digoust war www.gmb.bzh.

Gwareziñ ar Grilian

Hiniennoù, aozerien an tiriad ha strolladoù lec'hel a c'hall skoazellañ ar Grilian hag ar bevliessourted dre vras :



Merañ koadoù gwez deliek lies oad, gant koad-dindan ha tachennoù laosket da goshaat.



Merañ ar girzhier evit ma vefent ledan ha liesseurt.



Derc'hel strouezh lez ar c'hoadoù.



Derc'hel pe adkrouiñ ur c'harzhaoueg stank.



Krouiñ tachennoù dieub evit an adnevezadur naturel (digoadennoù).



Plantañ spesadoù gwez deliek eus ar vro (kraoñ-kelvez en o zouez).



Sevel arroudennoù evit al loened vihan dreist an hentoù implijet kalz.



Harzañ kresk poblañs ar c'hizhier doñv e pep lec'h en natur.



Kemer perzh, e-giz emañ posubl, e stourm a-enep ar cheñchamant hin.

Savetomp hor Grilianed !

Kevrad natur bronneged bihan Breizh ha steuñvenn c'hlas douar ha dour zo ur programm studi ha gwareziñ (2016-2019) renet gant :



Groupe Mammalogique Breton - www.gmb.bzh

Maison de la Rivière - 29450 Sizun
02 98 24 14 00

Ha harpet gant :



Krouet gant ar GMB (Joselin Boreau ha Catherine Caroff, adlenn Pascal Rolland), Pajennaoz ar Catherine Caroff (GMB), Imprimerie de Bretagne (Montroulez), miz gouere 2018. Tresadennoù Céline Lecco - Skeudennoù : Alain André, Joselin Boreau, Freeimage (Yarik Mishin), Jacques Gilléron, Emmanuel Holder, Nicole Lepertel (GRETA), Bastien Montagne, Pascal Rolland, Franck Simonnet, Skol ar C'heuzioù, Sue Smallshire, wikimedia.org (Hille et Roger Prat), Kartennoù : Hervez Buchner, Juskaits, 2010, cheñchet hervez doadskridoù rannvroel ha P. Rolland, hervez an Atlas ar Bronneged Breizh, 2015, hizivadur 2017, troet e brezhoneg gant Ehora le Gall ha Romain Barbé 2026.



Ar Grilian e Breizh

Ar Grilian,

Muscardinus avellanarius - Muscardin

Pezhioù mat evit ar Grilian

Bevañ a ra ar Grilian war un dachenn strizh (tro-dro 50 m zo etre e neizh goañv hag hini an hañv). Ezhomm en deus a goulzoù-amzer merket gant goañvioù riv, hag a dachennoù gwezek tro-dro dezhañ / er meziad :

- | | |
|---|--|
| 1 Ur bloc'had devezhioù-arat a goad | 4 Gwez spem-du war an aod |
| 2 Koad-dindan liesseurt | 5 Liorzhoù tro-dro kêrioù ha kêriadenoù |
| 3 Garzhaoueg a c'helvez, drez, spem-du, gwez babu, gwezvoud... | 6 Ribloù koadeg |

Ar Grilian, ur spesad a vev er gwez


Ur grigner bihan eo ar Grilian, a vent gant ul logodenn. Muzuliañ a ra tro-dro 7 sm hep al lost ha cheñch a ra e bouez eus 15 da 40 g hervez ar c'houlzoù-amzer.

Beviñ a ra e koadoù-dindan ha lez ar c'hoadoù, liammet eo gant ar c'harzhaoueg. Diouzh an noz ha sekred eo, n'eo ket aes d'o gwelout ha n'eo ket anavezet kalz.




Lec'h emañ kavet

Er bed, n'emañ nemet ar Grilian en Europa hag Anatolia. E bro Frañs, n'eus ket mui anezhañ e su al linenn etre Bourdel ha Marseilh. Seblant a ra ar spesad war ziribin e lodennoù Europa zo.



E Breizh, ar Grilian zo e norzh ul linenn etre Montroulez, Rostrenn ha Kastell-Briant. Seblant a ra poblañs Montroulez dispartiet ouzh ar re all. War ziribin eo ar spesad er rannvro.



An nevezamzer hag an hañv

Ar Grilian a sav e neizh er strouezh. An neizh a zo ront e stumm. Savet eo gant delioù, korre drez pe gwezvoud, geot sec'h ha bruzhun koad. Etre 12 ha 15 sm e vent.

Adalek miz Mae e vez ganet gant ar barez etre 3 ha 6 babig.



Ar goañvaat

E kreiz an diskaramzer ez a da gousket ar Grilian en e neizh difuet tre betek fin miz meurzh. War al leur emañ hemañ, kuzhet dindan wrizioù pe delioù sec'h. Kregiñ a ra ar Grilian da c'hoañvaat pa vez an temperadur war ziskenn.

E reol-voued

Etre an nevezamzer hag an diskaramzer e vez debret boued disheñvel gant ar Grilian. Hervez e vez kavet : broñsoù, bleunioù, kalonennoù babu, kraoñ-kelvez, mouar, frouezh, biskoul, c'hwen-gouez ha kement-zo. Ar c'hraoñ-kelvez zo druz a-walc'h evit lakaat ar Grilian d'ober pourvez. Mod-se e c'hell tremen ar goañv.

